

Tud ar vro - Bro Leon
Roll kanaouennoù - Dañs a-benn

Ar Jude

Ar Jude 'zo ur vro vrav situet etre daou ganton
En un tu emañ Sizun en tu all Landivizio
Situat eo ivez etre teir barrez
Lambaol ha Lokmelar ivez an Dre-Nevez

Kalz broioù am eus treuzet dre m'am eus beajet
Diwar ribl an Télégraf, kaerañ bro 'm eus gwelet
Ur chapel eus ar c'haerañ er Jude zo saved
En enor da Santez Anna, mamm gozh ar Vretoned

Ur richerig vihan a zo diouzh he zreuziñ
Hag e komañs er Brajenn er bod da echuiñ
Un dudi eo ar Jude gant he holl parkeier
Ar re en em gontant eno gavont ket hir an amzer

Un dudi eo er Jude labourat er parkeier
Dre ma klever diouto un nombr bras a gleier
Diouzh ar mintin pa saver 'klever kloc'h bras Lambaol
Kloc'hig bihan ar seurezed o tintal d'ar skol

An angelus da grestreiz a glever e Guimilio
En Dre-Nevez, Lokmelar alies e Landivizio
Klevet a reer ivez re Sant Tegoneg, Gwiglan
Ha kleier bras Kommanna en o bord lez o-unan

Pa dosta an abardaez, echu son ar mouilc'hi
Klever sonerezh Sizun, Logi ha Plouziri
Pa gomzin eus ar c'haerañ sonerezh er vro-mañ
Eo kloc'h bihan Pen-ar-Gear hag hini Santez Anna.

Ar c'horn-boud a vez klevet dre pevar c'horn ar vro
O c'hervel da vont d'ar pred pe d'an ambrougadegoù
Kanaouenn a vez ivez dre partout er c'hontre
Er goañv da nozvezhiañ, en hañv da leurioù nevez.

Ar bleuñv er bodennoù hag an delioù er gwez
Klever kanaouenn ha dañs war al leurioù nevez
Pegen laouen eo da zon gwelet e vugale
O kanañ hag o tañsal er vro gaer a Jude

Em huanad diwezhañ 'c'houlennan digant Doue
Kanañ c'hoazh ar son-mañ da veuliñ va c'hontre
Ha da veuliñ ar re zo ya chomet er brezel
Evit derc'hel d'ar vro-mañ, anv a Vreizh-Izel

Tad Augustine Bothorel, Locmélar.